

XV

Ni c'houlen pardon evit hor bro garet,
Evit an holl dud zo dallet ho spered,
Ni c'houlen truez evit hor re vihan,
Vidomp hon unan.


GWENNAEL.

*Santez Mari mam Doue
Dionallit ho pugale.*

Imprimatur :

Corisopiti, die 22 Jun. 1911.

A. COGNEAU,
p. g.



Pardon bras Lourd *d'an trede sul a viz Gouere.*
D'ar zadorn arog : Offerennou da 6, 7 ha 9 heur.
Da 8 h. deuz an noz : procession deus an iliz parrez
da Lourd ; gousperou ; sermon ; procession ar gou-
lou. Coessionnou epad an noz (1).

D'ar sul : Offerennou, da 2 h., 5, 7, 8 h. Offeren
bred da 10 h. Gousperou, da 2 h. 1/2 ; procession ;
benediction ar Sakramant.

Lun : Offerennou, 6, 7 ha 9 heur.

(1) Pedi a rer da heuil ar pardon noz gant devotion.
Arabad e vez dizurs ebet, gant aon e vez red lezel ar par-
don noz a gostez.

Cantik

INTRON VARIA LEUHAN

DISCAN :

O Guerc'hez dinam, deut er bed heb pec'hed,
Da chapel Leuhan ni zired d'ho cuelet ;
Euz barr an envou selaouit heb dale
Mouez ho pugale.

I

Bep ploaz e veler euz donar Breiz-Izel
An dud niveruz, laouen o tilezel
Ho zi, ho labour, da vonet d'ho pedi
Da Lourd, o Mari.

II

Ni garfe nijal tre d'ar roc'h burzuduz
A zo bet breset gant ho treid, mam Jesus,
D'ar feunteun dispar, louzaouen peb clenved,
Ar c'horf, ar spered.

III

Ma n'hellomp siouaz ! holl cuitât hor mēziou
Da gerzet ken pell, beteg ar menezion,
Aman, calonec, d'eo'h ni gas hor peden
Dirag ho skenden.

IV

Eur person caret he zavaz eun dervez
Dre anaoudegez evidoc'h, o Guerc'hez ;
Rag dre ho scoazel e cavaz ar guelet
En doa dem-gollet.

V

Gant ar bloaveziou, bennoz d'an dud fidel,
Eur person nevez a zavaz eur chapel
Eur men zo enn-hi, euz a Lourd digaset
Er voger clozet.

VI

Eun tam euz ar voal zo ganeoc'h bet douget
Euz Rom da Leuhan eun deiz zo digouezet ;
Pe seurt relegou a ve ken talvouduz
Ha re mam Jesus ?

VII

Piou c'helfe laret ar grason ken nerzuz
A scuillit leun zorn, o mam madelezuz,
Var ar gristenien a deu a greiz calon
Aman d'ho pardon.

VIII

Mam a drugarez, c'houi zo ken gallouduz !
Mirit na gouezo varnomp counnar Jesus.
Guerc'hez ar menez, scoazellit ac'hanomp,
Pedit evidomp.

IX

X Guechall ar Vreiziz, leun a zoujans Doue
Hen anaveze vit ho mestr, ho roue.
O, grit ma yirimp, daoust d'an enebourrien
Bepred he lezen.

X

? Mez hirio siouaz ! calz a dud, touellet
Gant an droug-spered, ho deuz hanter-gollet
Feiz coz ho zadou ken stard en ho c'hreden
Lezet ar beden.

XI

X Na ped, d'ar guener, coulz ha d'ar vijilou
A dor al lezen o tibri ho frejou ;
Enn-ho ar pec'hed, gant ar boued difennet
A zo diskennet.

XII

X Lod zo ne glevont, d'ar zul na d'ar gueliou,
Mouez drant ar c'hleyer ho galv d'an ilizou ;
Lod n'ouzont paouez, zoken var ar mēziou
Da zeiz an Aotrou.

XIII

X Darn zo dizeblant euz ene ar bugel
Crouadur Doue, templ ar Spered Santel,
Grêt evit beva en envou peurbaduz
Gant he vreur Jesus.

XIV

Euz ar guall-scueriou hag ar scol dibater
Mirit, mam zantel, hor bugale dener ;
Criz eo ar brezel zo d'ho feiz discleriet
Gant tud milliget.